

Breudeuriezh Drouized, Barzhed hag Ovizion Breizh : Gorsedd

(Fraternité des Druides, Bardes et Ovates de Bretagne : Gorsedd)



Ar C'hoursez a salud ar prezegennoù e korseg. Souezhet eo n'eus ket bet memes tra e yezhoù Breizh e Roazhon

Ar C'hoursez, Breudeuriezh Drouized, Barzhed hag Ovizion Breizh, a salud ar prezegennoù e korseg e Bodadeg Korsika a berzh an dilennidi nevez warlerc'h votadegoù an 13 a viz Kerzu.

Pennoù bras nevez ar vro a zo bet paket peg ganto er gwir hag er Frankiz da genofisielaat yezh Korsika tal kichen ar galleg, ar pezh a lak en araj evel boas bandennad jakobined ordinal Bro C'hall.

Merzhet eo bet gant ar C'hoursez n'eus ket bet un taol-kaer a seurt-se e Roazhon a berzh ar skipailh nevez kadoriet.

Souezhet e c'hell bezañ ar C'hoursez pa'z eo bet respontet d'he goulennoù (gwelit anezho war hol lec'hienn internet) gant Jean-Yves Le Drian, hennezh war ar renk d'ar mare-se, « *e oa bet degemeret a unvouezh e 2004 ur mennad oc'h anzav ez ofisiel ar brezhoneg hag ar gallaoueg evel yezhoù Breizh tal kichen ar galleg* ».

Ar C'hoursez a zo kerse ganti peogwir eo aet, war a seblant, ar mennad-se en drouziwezh a benn ar fin, marteze dre ma'z eo graet gant ar stad a zifrae er mare-mañ da stankañ an hent da gement komzenn demokratel o tirenkañ an talbenn nasional republikan divizet e Paris.

Aliesoc'h eget biskoazh e c'houlenn an ober gant yezhoù hor bro war an dachenn foran un emzalc'h dieub. Gedal a reer betekhenn an disterañ hardizegezh a berzh hon dilennidi a Vreizh.

E Kemper d'an 21 a viz Kerzu 2015

Per-Vari Kerloc'h, Drouizh Meur Breizh